

Sevenadur

Berzh an teulfilmoù

Pa vez an devezhioù o verraat, e miz Du, e teu endro Mizvezh an Teulfilmoù.

Abaoe ar bloavezh 2000 eo deuet miz Du da vezañ ur gouel lidet e Frañs a-bezh, kenurzhiet gant Images en Bibliothèques Gant Daoulagad Breizh e vo kenurzhiet an traoù e Penn-ar-Bed, evel bep bloaz, asanibles gant Levraoueg Penn-ar-Bed, hag o kenlabourat gant kevredigezhioù all eus Breizh, Cinécran e Gwened, Comptoir du Doc e Roazhon ha Double-Vue e Sant-Brieg.

E miz Even, e Gwilers hag er Forest-Fouenant, e oa bet bodet an holl aozerien gant Daoulagad Breizh evit ma rafent o dibab e-touez an 20 film a ginnige sk-pailh Douarnenez, abred



Tennet eus an teulfilm "Anais s'en va-t-en guerre"

a-walc'h evit ma c'hellfent aozañ stummadurioù evit deskiñ penaos kinnig un teulfilm, penaos magañ an eskemm gant ar sellerien. Evidomp eo a-bouez eskemm goude ar film. An holl filmoù a ginnigomp a zo nevez -- bet graet e-kerzh ar bloaz -- ha pedet e vez atav unan bennak, ur sevenner da skouer, evit boueta

an eskemmoù" eme Elen Rubin, kenaozerez ar c'houlizad. En holl e vo skignet 40 film, da lavaret eo 104 abaden skignet e 62 kêr eus Penn-ar-Bed. Evit dont a-benn eus kement-se he deus gallet kenlabourat gant 74 aozer, mediacouegoù evit ar braz anezho, 46, mat ivez 9 c'hevredigezh, 10 sal sinema

War gaout an dud

War an 20 film kinniget e miz Even, ha kalz anezho bet diskouezet da geñver festival sinema Douarnenez, zo bet dibabet 13 gant an aozerien. Ar 27 all a zo bet dibabet en un doare emren gant an aozerien. Forzh pehini 'vo bet dibab ar gevelerien e ranko an aozerien ober war-dro an eskemm a vo goude. Ha Daoulagad Breizh, evit ar filmoù a vez brudet ganto, da sikour anezho da gavout ur sevenner, un teknisian. «Aozañ a reomp troiadoù evit ma koustfe nebeutoc'h dezho» a resisa-hi. Ne chomo dezho nemet ouzhpennañ priz skignañ ar film, war-dro 100€ an eur, 6300 arvester a oa bet warlene Gortoz a reer tamm-pe-damm

ar memes kont e 2014 «Ne glaskomp ket diorren an niver a abadennoù hag a aozerien, met kentoc'h labourat mat gant an dud, ambroug mat an aozerien.» a zispleg Elen Rubin. Lod eus aozerien 2013 ne vint ket evit kenderc'hel met kendalc'het e vez gant ar braz anezho evel mizi Sun, Baz pe Eusa, Kumunioù nevez a weler ivez, evel Sant-Ajar. Skaer pe c'hoazh Molan "Da bep aozer da zibab e brogramm. Oberennoù talvoudus int hoil" emezi, hep kaout c'hoant brudañ muoc'h hui pe hui eus ar filmoù memes ma oa mat zo filmoù zo -- *Anais s'en va-t-en guerre*, *Les chevalières de la table-ronde*, *Le vide dans la maison*, *Retour en Algérie*, *JSDM* -- a vez muoc'h a c'houlenn warno.